

396

Son Bacchus.

(222, suite)

Eus oll Doueou ar bayonet,
Bacchus eo va oll idol ;
Yan-Vourdel eo bet leshannet,
E'hoas en deus mil hano drol. (223)
Anfin, gantan me so scoliet
Da vania pint, gueren ;
E scol Bacchus me meus disqet
Goro pris ar variqen.

Bacchus en deus speret brillant,
Habil eo en peb langach ;
Gantan e ma an oll sqiant,
Peb rery ha peb avantach.
Ur mestr eo da rei arison,
Dioz m'int renqet en e benn :
Bez' en deus ar quella levrion,
Me lavar pint ha gueren.

Dija eo ive qer brudet
Hac er foar hac er marc'had,
Petra ve prenet na querezet
Anes caout ur banne mad. (224)
Ouc'h penn ma vec'h mignon dezã,
Hac eveldoy en e scol,
C'hois an sicourfe da gana :
Bacchus eo va oll idol.

Dioch ar mintin, pa zifunan,
Me sonch clêvet en c'hichen
Hac a sebl'nt din e glêvet
O lavarar evellen :

Sao ta buan, mignon fidel,
Arabat eo coll amzer ;
Poent eo bisita an donel
Eno emã da zez'ez.

Na ziferan qet ur momet,
Hac em be me poan em penn,
Rac prest e vezan soulajet
O clêvet son ar veren.
Bacchus a deu gant e liqeur (225)
Da arrousi va c'halon ;
Ne ouffen qet caout goell bonneur
Equei caout ur seurt mignon.

Ur veach ouc'h taol azezet,
Netria n'el va estoni,
Hac e ve curun ha luc'het,
Me sonch eo d'am enori.
Bacchus eo va mestr souveren,
Hac an divoal diouc'h peb tra :
Va dorn armet gant ar veren,
Petra ell mui va sponta ?

Va greg a ra din mil injur
E tebran va oll danvez ;
Me brouvo e lavar gaou sur,
Hac e zaen en proces.
Rac me a ell toui amã,
Hac a gavo testou mad, (226)
Ne zebrañ james heb eva
Duspen gant ur c'hamarad.

Sur ouz c'hoas, pa zañ da gôves,
 Va c'hôvessour am tamal,
 Mes n'em c'havo get alies,
 Da rei din tamou scandal.
 Mes me gôvessai ouz Bacchus,
 Ha Bacchus am absolve;
 Eus ar giin e voar ar vertus,
 Ar giin eo am rent mezo.

(227) Ur bêleg gant e dheologi,
 Gant ardost ar medicin,
 En deus c'hoant d'am persuadi
 E ra droug ur banne giin.
 Mes m'ar lezo da lavarret,
 Hac a yel d'am zrein ato.
 Ne rañ fors eus an doctoret:
 Beva rin bete'r maro.

Ma elfen chom atao mezo,
 Me sonch e varvfen ervad,
 Meur a vech me so bet maro
 Dre an hent gant va c'horfat.
 Na tanten na poan, nac angen
 Endra vijen er stat-se:
 Me garfe en ur variqen
 Ellout foura va ene.

C'houi etrezoc'h, inoçantet,
 En ho clêvet [,] en ho poan,
 Roit arc'hant da vedisinet
 Da grevi gant mil tizan.
 Hac em bez ur barrat clêvet,
 Bacchus eo va medicin,
 Me so custum diouc'h e remed;
 (228) Petra so quell equet giin?

Ma tigoesse ganen mervel,
 Mes, ma ellan, ne rin get,
 E tij Bacchus, va mestr fidel,
 Guit ma vezin entretret.
 Er chas, e penn ar variqen,
 Anter-digor va quinou,
 Erit, pa droi an duellen,
 Ma lonqin beradennou.

Arabad eo clasq bêlegen
 D'am sicour, d'am asista,
 Mes va oll breudeur everrien
 A gano din Libera.
 Sonit caon gant ar verennou,
 Cassit lijer da Vourdel:
 Eno e caner serrichou
 Vit ar mezvierrien fidel.

fin.

(Vol. IV, p. 222-228.)
 13 str. numérotées.